

# Kenderc'hel gant ar stourm ?

Goulenn diazez : Piv e oa an FFL\* hag ar rezistanted eus Breizh ? \* Forces françaises libres

Kelc'hiad 4 – 3<sup>e</sup> klas – Frañs e-kerzh an Eil Brezel-bed

## 1. Ul lamm ken trumm

### a. Liv ur brezel all

« Hon tro a zeuas da bignat el linenn gentañ. Va c'hompagnunezh din, evelato, a chomas un tammig en a-dreñv. Emaomp e-kreiz ur c'hoad, pevar c'hilometr diouzh an Alamaned. Ar boledoù a c'hell kouezhañ warnomp aes, ha setu perak e reomp toulloù en douar ha warno e lakaomp tri pe bevar gwiskad korfoù gwez a bilomp hag a droc'homp hon-unan e treujenoù berr, ha war-c'horre e taolomp, evit echuiñ, un deoder vat a zouar. »

« Ur soudard breizhat », pennad embannet e *Feiz ha Breiz*, 76<sup>vet</sup> bloavezh, niv. 1, Genver 1940



↑ Kanolierien c'hall en Elzas e-pad ar goañv 1939-1940

### b. 13 a viz Even 1940

« [...] Peurvuañ e vlenien va c'hañfarded dre hentoù distro ha dizarempred evit gallout aesoc'h kerzhout ha diskuizhañ nebeudoùigoù. Hogen er c'hêriadennoù evel er c'hêrioù, pebezh engroez pennfollet, ha pebezh trevell treuziñ dre vesk mil ha mil karr ha gweturioù-dre-dan, hag ur mor a dud war-droad. Spontus e oa gwelout an dud keizh, gant o zammig peadra gwintet mat pe fall hag a-stlabez en o c'hirri. Tud vras ha bugale er-maez en noz, evel ar soudarded. »


Marsel ar Barzh, *An Erc'h du*, An Alarc'h embannadurioù, 2004, p. 103

### Barregezhioù

- Tennañ titouroù resis diwar meur a seurt dielloù evit respont d'ur goulenn resis (testennoù, skeudennoù, enrolladennoù).
- Klask titouroù war ar Web.
- Ober gant meur a zoare disheñvel evit kinnig ur respont.

### c. An arsav-brezel

Ar marichal Philippe Pétain, nevez-anvet e penn ar gouarnamant, a c'houlennas digant an Alamaned sinañ un arsav-brezel d'ar 17 a viz Even 1940. Sinet e oa bet d'an 22 ha lakaet da dalvezout d'ar 25 e-kreiz an noz. Diwar-se e oa bet rannet Frañs e div lodenn, hini an norzh hag aodoù ar meurvor Atlantel e dalc'h an Alamaned ha hini ar su renet gant gouarnamant Vichy a grogas da genlabourat da vat gant an nazied azalek miz Here 1940.



↑ Ar marichal Pétain



↑ Plakenn war ti-kêr Eskibien



Selaouit prezegenn ar marichal Pétain er radio d'ar 17 a viz Even 1940.



↑ Pennad bet embannet e *Le Courrier du Finistère* d'ar 16 a viz Du 1940

## 2. Galv ar Jeneral de Gaulle (18 a viz Even 1940)



a. Sellit ouzh an abadenn bet skignet war Frañs 3 Breizh d'ar 24 a viz Even 1990


b. Piv e oa an FFL ?

D'ar 1<sup>añ</sup> a viz Gouere 1940 e oa bet savet an FFL evit bodañ an holl dud a felle dezho kenderc'hel gant ar stourm da-heul ar jeneral de Gaulle. Enno e oa martoloded (FNFL, *Forces navales françaises libres*), nijerien (FAFL, *Forces aériennes françaises libres*) ha soudarded war droad (graet FFL anezho). D'ar 1<sup>añ</sup> a viz Eost 1943 e oa bet bodet an FFL hag arme Afrika ar jeneral Giraud da sevel Arme Frañs an Dieubidigezh. En FFL e oa Frañsizien, soudarded eus an trevadennoù (ha ne oant



ket keodedourien « c'hall » ez ofisiel) hag estrañjourien. An dregantadoù roet zo savet diwar an FFL ganet e pennvro Frañs.

← Ar jeneral de Gaulle er BBC e 1941



↓ Banniel an FNFL

Lakaet e vez c'hoazh e penn a-raok al listri-skol Belle-Poule hag Étoile rak e Breizh-Veur edont e-pad ar Brezel.

↑ An FFL eus Breizh


5 703 FFL a oa genidik eus Breizh (18,2 % eus an FFL)

1 218 niver an FFL genidik eus an departamant  
 3,9 % dregantad e-touez an holl FFL  
 21,4 % dregantad e-touez an FFL eus Breizh



← ↓ Hurricane Maurice Halna du Fretay

Lakaet en doa, dindan ar ger-stur e brezhoneg, anvioù an dud o doa sikouret anezhañ da loc'hañ kuit.



c. Un nebeud skouerioù



**Jean-Louis Le Gall**, ganet e Ploueskad (29) e 1920, a gemeras perzh en emgannoù Dukark war al lestr-tarzh gall *Flore*, a-raok mont da FNFL e miz Gouere 1940. E miz Ebrel 1941 e timezas gant Olga Standish ha dindan anv e wreg e servijas er *Royal Navy* (arme-vor Breizh-Veur). Mont a reas diwar wel pa oa bet konfontet an *HMS Beverly* e meurvor Atlantel an hanternoz d'an 11 a viz Ebrel 1943.



**Jeanne Bohec**, ganet e Plistin (22) e 1919, a zeuas a-benn da guitaat Brest e miz Even 1940. Ret e oa bet dezhi gortoz miz Genver 1941 evit mont da FFL (ne oa bet krouet ur bagad maouezed en FFL nemet e miz Du 1940). Goude bezañ bet sekretourez ha kimiourez e oa bet degemeret er BCRA\* ha deuet da vezañ stummerez war an danvezioù-tarzh. Bez' e oa bet unan eus ar c'hwec'h maouez bet harzlammet a-zioc'h Frañs. Karget e oa da stummañ ar rezistanted war an danvezioù-tarzh. Kemer a reas perzh e tagadennoù zo ivez. Kontañ a reas he buhez en ul levr anvet *La Plastiqueuse à bicyclette*.

\* BCRA : *Bureau central de renseignements et d'action* (Burev kreiz an titouriñ hag an ober).

**Maurice Halna du Fretay**, bet ganet e Sant-Yunieg (22) e 1920, a oa sot-pitilh gant ar c'hirri-nij abaoe e vugaleaj. Abalamour da se e teskas leviañ – hag eñ yaouank c'hoazh – hag e prenas ur c'harr-nij bihan Zlin XII. E miz Gwengolo 1939 e lakaas e anv en arme-aer. Met ne oa nemet un danvez-levier pa oa bet an arsav-brezel ha disoudardet e oa bet d'ar poent-se. Dre guzh e prietas e garr-nij ha d'ar 15 a viz Du 1940 e teuas a-benn da loc'hañ kuit ha da zouarañ e Breizh-Veur. Degemeret e oa bet en FAFL hag er *Royal Air Force* war un dro. Goude bezañ peurzasket e vicher a levier brezel e voe kaset d'ar stourm e miz Du 1941. Er skouadron 174 edo pa oa bet diskaret a-zioc'h Dieppes d'an 19 a viz Eost 1942. Daoust dezhañ bezañ ur paotr a Vreizh-Uhel en doa lakaet skrivañ war e garr-nij Hurricane daou c'her-stur e brezhoneg : « Breiz dalc'h mad » ha « Kentoc'h mervel ».



### 3. Ar Rezistañs diabarzh

#### a. Breizh e dalc'h an arme alaman

**BEKANNTMACHUNG**

Durch das Kriegsgericht der Feldkommandantur (Ile-et-Vilaine) ist der Mechaniker Marcel BROSSIER, geb. am 3.3.1909 in St. Gauburge, ledig, wohnhaft in RENNES, rue Duhamel 33 französischer Staatsangehöriger, am 12. September 1940 wegen Wehrmittelbeschädigung (Durchschneiden eines Nachrichtenkabels) zum Tode verurteilt worden. Das Urteil wurde heute vormittag 10 Uhr vollstreckt.

Rennes, den 17. September 1940.

DER FELDKOMMANDANT.

---

**PROCLAMATION**

Par jugement du Conseil de guerre de la Feldkommandantur (Ile-et-Vilaine) le mécanicien Marcel BROSSIER, né le 3 Mars 1909 à Ste-Gauburge, célibataire, citoyen Français demeurant à RENNES, 33, rue Duhamel, a été condamné à mort le 12 Septembre 1940, pour avoir endommagé des objets militaires (sectionnement d'un câble téléphonique).

Le jugement a été mis à exécution ce matin à 10 heures.

Rennes, le 17 Septembre 1940.

DER FELDKOMMANDANT.

**ORDONNANCE**

Le 13 Octobre 1940, quelques civils Français ont tenté, vers 23 heures, Boulevard de la Tour-d'Auvergne, d'attaquer un membre de l'armée allemande. Les agresseurs ont pu s'enlair sans être reconnus.

A titre de répression pour cet incident, je fixe les heures de prohibition de sortie pour la population de la ville de Rennes à :

**21 heures jusqu'à 5 heures du matin,**  
pour la durée comprise entre le **19 et le 26 Octobre 1940.**

Les contrevenants à cet ordre seront appréhendés, au cours de rafles spéciales, et sévèrement punis.

LE FELDKOMMANDANT.

---

**ERLASS.**

Am 15. Oktober 1940 versuchten einige französische Zivilisten gegen 23 Uhr abends einen deutschen Wehrmatsangehörigen auf dem boulevard de la Tour-d'Auvergne zu überfallen. Die Täter sind unerkant geflüchtet.

Zur Strafe für diesen Vorfall setze ich die Sperrstunde für die Bevoelkerung der Stadt Rennes auf

**21 Uhr abends bis 5 Uhr morgens**  
fest für die Zeit vom 19. bis 26. 10. 1940.

Wer dieser Anordnung zuwiderhandelt, wird durch besondere Streifen festgenommen und streng bestrast werden.

DER FELDKOMMANDANT

**AVIS OFFICIEL**

Par ordre des Autorités allemandes, le Préfet d'Ile-et-Vilaine appelle l'attention du public sur " l'Ordonnance pour la protection contre les actes de sabotage ", en date du 10 Octobre 1940, suivant laquelle est condamné à mort quiconque cache ou héberge chez lui des prisonniers de guerre soit évadés, soit non pourvus d'un certificat de libération ou d'un titre de permission. La même punition s'applique à celui qui cache ou héberge des personnes appartenant à une armée ennemie (par ex. : l'équipage d'avions ayant fait un atterrissage forcé, parachutistes, etc.). Quiconque favorise l'évasion de ces personnes, s'expose donc aux sanctions les plus sévères.

Rennes, le 25 Juillet 1941.

#### b. Dastum titouroù

Per-Mari Mevel a oa kouezhet prizoniad e miz Even 1940 ha kaset d'ur c'hamp prizonidi e Silezia. Dont a reas a-benn da sachañ e skasoù gantañ ha da zistreiñ da Valognes e lec'h m'edo kelenner a-raok ar brezel.

« Dont a ra, hep dale, da vezañ ezel eus ar rouedad "Centurie", dindan an anv "Mouchel". Ar gefridi soursiet ennañ a zo bezañ war evezh ouzh monedonea an Almanted e hanternoz ar c'hCotentin, dastum titouroù o tennañ d'o oberiantizoù, diarbenn ma zo moaien o itrikoù, ha mont da c'houde da gas an eostad traoù-se da greizenn ar Rezistañs, e Caen, e lec'h 'veze fiziet ennañ, dre gomz ha dre skrid, kemennadurezhioù hag urzhioù o tont eus Londrez. Dezhañ d'o digas d'ar gêr ha d'o silañ er skouarn hag an dorn a-dres. Daou-ugent gwech en deus bet graet ar mont-dont-se, etre Valognes ha Caen. Ez ofisiel, ar veaj a oa evit mont da heuliañ kentelioù e skolveur Caen. Un digarez toull, ma oa unan ! »

Charlez ar Gall, « Ur steudad bloavezhioù start », *Brud Nevez*, niv. 162, 1993

↓ Goude ur gwalldaol bet kaset da benn gant ar Rezistañs e oa bet ret skarzhañ ar bagonioù kuit ha kempenn an hent-houarn



↑ Al listri hobregonet alaman *Gneisenau*, e-kreiz, ha *Scharnhorst*, kuzhet dindan rouedoù, e porzh Brest e 1941

De Hil – Stop – *Scharnhorst* et *Gneisenau* arrivés sur rade de Brest le 22 mars – Stop – Paraissent disponibles – Stop – *Gneisenau* amarré bassin 8 de La Ninon – Stop – Porte ouverte – Stop – *Scharnhorst* amarré au quai de La Ninon à l'ancien poste du *Dunkerque*.

↑ Pellskrid bet kaset da Londrez gant Hilarion

An amiral Philippon, alias Hilarion, *Le Blocus du Scharnhorst et Gneisenau*, 1967, p. 118.



#### c. Sevel e vouezh a-enep an STO\*

Selaouit testeni Yves Léon diwar-benn an 9 a viz Meurzh 1943 e Plouared.

\* STO (Servij al labour ret, *Service du travail obligatoire*)

#### d. Eus ar jestroù « bihan » d'ar stourm armet

Selaouit testeni Désiré Camus.

#### e. Rouedadoù Sibiril, Var, Shelburn

Selaouit displegadennoù Bernard Cabon diwar-benn ar rouedad Var.

## f. Ar rezistanted o kemer perzh en Dieubidigezh (miz Mezheven 1944-miz Mae 1945)



### ↑ Strouezheg Sant-Marc'hell (56)

D'an 18 a viz Even 1944 e oa bet taget strouezheg Sant-Marc'hell gant an arme alaman. Skoazellet e oa ar rezistanted bodet eno (e-tro 3 000 anezho) gant 200 harzlammer gall an SAS (*Special Air Service*).



### ↑ Strouezheg Plijidi (22)

Kemend-all a c'hoarvezas gant strouezheg Plijidi-Sant-Konan d'ar 27 a viz Gouere 1944. Daoust da se e kendalc'has ar strollad da dagañ ar rejimantoù alaman o doa da vont war-zu an Normandi, a-raok kemer perzh e dieubidigezh Gwengamp d'ar 7 a viz Eost 1944.



### ↑ FFled en-dro da chakod an Oriant

An FFled ha soudarded amerikan a oa karget da gelc'hiañ ar chakodoù e dalc'h an Alamaned azalek miz Eost 1944.

« Me 'oa e strollad Job hag e voemp kaset war Gorzenn e lec'h ma oa kazematoù almant dalc'het atav war bord ar mor. Ni a dlee diwall e tu an douar. Setu ma oamp lakaet e pozision, tri ac'hanomp gant ur fuzuilh-mitrailher, e-touez ur c'haead lann verr a-zioc'h un tamm kroashent, met gant urzh da ziskravañ buan a-walc'h ma teuje bec'h warnomp. Ar re all a oa displeget pelloc'h en a-dreñv, evit ivez diouzhtu, ma teujent er-maez, stankañ an hent d'an Almanted.

Gwazed *maquis* Treouergad o deus kempennet holl an Arvor tro-war-dro hag o deus evel-se sikouret dishualañ Brest. An Amerikaned gant o armoù pounner a frigase kazematoù an enebour, met a laoske da baotred ar *maquis*, ha n'o doa nemet o stomogoù, ar garg da ober ar rest. Ne'z eus ket bet a zizurzh. Nag a walldaolioù enep tud ha madoù, evel ma vije bet gelllet gwelet. »

Louis Conq, *Hekleo Traoñ Bouzar*,  
Moulladurioù Brud Nevez, 1987

## Klaskomp

### Pajenn 1

1. Piv e oa ar marichal Pétain ha peseurt diviz en doa kemeret d'ar 17 a viz Even 1940 hag abalamour da betra ?
2. Petra a soñje an dud, pe lod anezho d'an nebeutañ, diwar-benn ar marichal Pétain ?

### Pajenn 2

3. Piv e oa ar jeneral de Gaulle ha petra en doa graet d'an 18 a viz Even 1940 ? Eus pelec'h ?
4. Petra o doa graet Bretoned zo evel paotred Enez-Sun neuze ?

### Pajenn 3

5. Peseurt obererezhioù pennañ o doa bet d'ober ar rezistanted e-pad ar brezel ? Savit ul listennad anezho diwar an dielloù kinniget.
6. Peseurt lezenn bet savet gant gouarnamant Vichy a oa bet penn-kaoz manifestadeg Plouared d'an 9 a viz Meurzh 1943 ? Petra a zegasas d'ar Rezistañs ?
7. Petra e oa ar rouedad Var ha petra a rae ? (Pelec'h, pegoulz, penaos... ?)

### Pajenn 4

8. Ha disheñvel e oa mont en-dro hag obererezhioù ar Rezistañs etre miz Even 1944 ha miz Mae 1945 ? Displegit.

→ Louis Conq  
hag e genseurded  
e miz Gwengolo  
1944



## Evit mont pelloc'h

- a. Kemer perzh e kenstrivadeg vroadel ar Rezistañs hag an Deporterezh (CNRD, *Concours national de la résistance et de la déportation*). Resisadurioù war [education.gouv.fr](http://education.gouv.fr) pe [Réseau Canopé](http://Réseau Canopé).
- b. Klaskit roudoù eus ar Rezistañs en ho kumun pe en ho korn-bro (monumantoù, anvioù straedoù, plakennoù-koun...).
- c. Ha kavet ho peus anvioù tud resis ? Klaskit hiroc'h diwar o fenn war Internet : [FFL](http://FFL) ; [an holl rezistanted](http://an holl rezistanted).
- d. Klaskit titouroù diwar-benn rouedadoù pe strouezhegoù ho peus klevet kaoz diwar o fenn.
- e. Meur a gan war follennoù-nij zo bet savet diwar-benn an Eil Brezel-bed hag ar Rezistañs, da skouer *Maleurioù ar Vro* ([ar follenn-nij](http://ar follenn-nij) / [ar c'han da selaou](http://ar c'han da selaou) / [ar studiadenn](http://ar studiadenn)). Klaskit titouroù diwar-benn an darvoud kontet. Kit war al lec'hiennoù [Chansons bretonnes sur imprimés populaires](http://Chansons bretonnes sur imprimés populaires) ha [Dastumedia](http://Dastumedia) evit klask skouerioù all.
- f. Meur a virdi zo da weladenniñ er vro, en o zouez : mirdi Sant-Marc'hell (56), Sant-Konan (22), Bourc'h-Baz (44) pe c'hoazh mirdi Beg-Lokmazhev (29).

© Herve Peaudecerf & TES 2022 – [www.tes.bzh](http://www.tes.bzh)

Kredadoù ar skeudennoù – p. 1 : kanolerien, dastumad Y. L'Hour/DR ; ar marichal Pétain, dastumadoù mirdi Breizh hag ekomirdi Bro-Roazhon ; plakenn Eskibien, poltred gant H. Peaudecerf ; pennad *Le Courier du Finistère*, CRBC-UBO-Brest – p. 2 : ar jeneral de Gaulle, BBC, domani publik ; banniel an FNFL, Pjotr Mahonin, Wikipedia, CC BY-SA 4.0 ; J.-L. Le Gall, dastumad familh Le Gall ; J. Bohec, domani publik/DR ; M. Halna du Fretay, dastumad familh Halna du Fretay – p. 3 : skritelloù ha poltred an tren, dastumadoù mirdi Breizh hag ekomirdi Bro-Roazhon ; listri alaman, dastumad dielloù Brest – p. 4 : strouezheg Sant-Marc'hell © OBC/mirdi ar Rezistañs e Breizh – Albom Corta ; strouezheg Plijidi ; FFled en-dro da chakod an Oriant, dastumad dielloù an Oriant ; Louis Conq, dastumad Gildas Priol, [www.resistance-brest.net](http://www.resistance-brest.net).